

BULLIOU AN AUTROU CHRIST,

Composez e Carmou brezonec.

Var eun ton nevez.

MAR plich ganêc'h e selaoufet
MEUR verz nevez zo composet :
Da eur plaç santel ez è grêt ,
Da Jesus-Christ ez è formet.

Abalamour da eur Chapel
Hon eus ebars en Breiz-Izel
En eur barres hanvet Scaër ,
En escopti eus a Guemper.

Christenien , oll me ho suppli ,
Deut da Sant-Salver da Goadri ,
Da c'honit an Induljançou
Zo deut demeus a Rom eno.

O visita hepken ar Chapel ,
E zeus Induljançou plenier ,
Pêvar-uguent deiz a bardon ,
D'hor pec'hejou remission.

O côves , o communia ,
Hac o visita ar plaç-mâ ,
Eus delivranç a bemp ene
A dân ar Purgator ive.

Gant ar Pab ez int accordet
Da guement den a zo ganet ;
Da guement a deu er plaç-mâ
A galon vad d'e visita.



Var an douar ne zeus hini
Devotoc'h plaç eguet Coadri :
Beza eo an anciena
A Chapelou Christ ar vrô-mâ.

Ebars er bloavez mil ha cant
Ha neuze pemp hac anter-cant ,
E voa ar guernez er vrô-mâ ,
Gant an dud oc'h e visita.

Tud fall voa ebars er c'hortre ,
Adversourien bras da Zoue ,
Hac a deuas da Sant-Salver ,
A loscas Bulliou ar Chapel.

Neglijet voe'r Chapel neuze ,
Hep nep mantion er c'hortre ;
Daou-c'hart hac anter-cant goude
Ec'h eure miraclou arre.

Mes dre habec ne vouient qet
Peseurt Sant enni a bedet ;
Inspiret voe' Autrou Qerne
D'ober orêson da Zoue.

An nôs goude'n orêson grêt ,
Doue en deus e exocet :
Dre e Vam e tisqüez dezâ
Ar vertus demeus ar plaç-mâ.

Hon Jesus-Christ evit e chloar
A zigaças var an douar
Men rouz pe dre bini ouier
E voa Jesus bars a beder.

Ar Groas a voa en darn ane ,
Darn all an tach en daou goste ,
Darn all form ar guruneo spern
En toullas betec an esqern ,

Ha toul al lanç en e galon ,
Mercou oll eus e Bassion .

Dont a ra tud a bep carter
Bemdez da Ilis Sant-Salver ,
Da guerc'hat ar mysteriou-ze ,
Dre ma zint furmet gant Doue.

Donet a ra d'y bêleyen ,
Ha tud-chentil ha bourc'hisien ,
Ha menac'h , ha cabucinet ,
Recoleset ha paysantet .

A deu da guerc'hat anezo
Da gaç gante d'o c'houentcho :
Bete Rom e casset anê :
Eur miracl bras eo qementse .

Auteur ar werz zo bet en Rom ,
Chaloni en Qemper o chom ,
En deus d'ar Pab o disqueuzet ;
Ouz o güelet voe estonet ,
A gav eur miracl bras en ze ,
Eno e viras aneze .

Hac a deu c'hoas da supplia
Ar gristenien var ar bed-mâ
Da zont da zouguen anezo
Abalamour d'ar miraclo .

A ra Men Sant-Salver bembe
En andret nep a zòoj enne :
Evit testeni o clêvet
Darn ar miraclou o deus grêt .

A vourg Crozon , Rene Joannas ,
Da ilis Coadri a deuas ,
Hac a gaças ive gantâ
Unan demeus ar Mein Christ-mâ .

En e barres pa éruas ,
An autrou Viqel a glêvas ,
Pini outân voa coleret ,
A redas buan d'e gavet.

Rentit dìn ar Men , emezàn ,
Oc'h eus digacet a Goadri amàn ;
Ha va-unan rentit-àn dìn ,
Pe birviqen n'oc'h absolvìn.

Ar pelerin p'en deus clêvet
E vije a absolven privet ,
A rentas prim ar Men dezàn ,
Hac er stlapas pell dioutân.

P'en devoe stlapet ar Men-ze ,
E lavaras da eguile :
Va rentit d'ar guêr , me ho ped ,
Ar sclêrijen a meus collet.

Allas Doue ! me vel dija
Ar vertus demeus ar Men-mâ :
Offancet e meus va Jesus ,
Cetu me rentet maleürus.

Mes , ne zeus câz.... monet a rìn
D'ar plaç devot eus a Goadri :
Eno me c'houlenno pardon
Digant Jesus a wir galon.

Aben daou pe dri de e voe
En Coadri , er plaç santel-ze ,
Ha n'en devoe qet ar güelet
Qen a voe ar Men deàn clasqet.

Clasqet e voe deàn ar Men ,
Laqet ebars en e guerc'hen ;
Var ben er guêr ma voa arri ,
E vele coulz ha pepini.

Var ar c'hayer e zê merget ,
Sinet mat ha goarantisset ,
En Crozon d'ar c'houlz-se Vigel ,
Hoguen ne fell qet en henvel.

Diou vreg eus ar guær a Venet :
Mari Riou ha Mari Mettet ,
A voa bet deut da bardona
Da Goadri , ar plaç santel-mâ.

Côvessel ha communiet ,
Roet dezo gant ar bêleg
Peb a Ven-Groas da gaç gante ,
Hac int d'o disqeuz er c'hontre.

Hac éruout eun den mechant ,
A voa hanvet Rene Jorant ,
Hac én qemer ar Men santel ,
En teuler en creiz ar rivier.

P'en devoe tolet ar Men-ze ,
E voe punisset gant Doue :
Maro d'an douar e coezas ,
Goude bet stlapet ar Men-Groas.

An diou vreg a grogas ennâ ,
Da zouguen d'ar guér anezâ ;
Neuze e tistrojont d'ar ster
O diou da glasc ar Men santel.

Pa érujont gant ar ster-mâ ,
E voa ar pesqet o cana ;
A ur vouez oll e canent guyê ,
En eur laret : *O Crux ! ave ,*
O Crux ! ave , spes unica !
Enor da Roue ar bed-mâ !

Autrou Doue ! eme'r pesqet ,
Peguer bras graç è Demp cavet

Ébars er ster-mâ ganemp-ni

Ar Men precius a Goadril

Ni a gano qen ravissant ,
Ma vo hor mouez qen eloquant ,
Ma vo clêvet betec an êe
Gant Jesus-Christ , Mab da Zoue.

D'ar Güener ar Groas , a bep bloa ,
E cân ar pesqet er ster-mâ ,
Ouzpen tri mil eus aneze ,
En amzer vardro ar Men-ze.

Qen agreabl eo o moueziou ,
Ma rejouissent sperejou
Ar re a dremen ar ster bras
En deiz-se d'ar Güener ar Groas.

Eus a escopti Sant-Brieuc ,
Eur plac'h , Janned ar Gall hanvet ,
E d'oe ar maleur da rancontr
Eur c'hi arrajet divergont.

Aroc voa bet o pardona
En Coadri , ar plaç santel-mân ,
E tigas ganti ar Men-Groas ,
Endro d'he gouzoug en lacas.

Ar c'hi , nonobstant a bep tra ,
A lampas pront gant ar plac'h-mâ ,
Hac a attrappas ar Men-Groas ,
Ha gant an arrach en lounkas.

Eur miracl bras da gompreni :
An diaoul a zorti diouz ar c'hi ;
Hac hep drouc e chommas ar plac'h ,
Hac ar c'hi a voe rentet yac'h.

Hemân zo eur miracl demp-ni ,
A dle donet d'hon exorti

Da zerc'hel mat da Ven Coadri ,
Hor prezervo diouz droug ar c'hi.

Eus a C'hourin , Mari Raoul ,
A roas he buguel d'an diaoul ;
Pa voe laret he guir presant ,
Ec'h antreas pêvar serpent.

Hac int lampat d'ar buguel-ze ,
Crêgui ennâo a bep coste ;
Pa n'ellent ober droug deân ,
O deus goulennet dioutân :
Petra zo ouz da brezervi ?
Na ellomp qet da remui .

Ar buguel , a bemp bloas oajet ,
Biscoas guer n'en d'oa lavaret ,
Qen a voa d'ar pêvar serpent
Ar c'homzou a glêver presant .

Emedi ganén Men Coadri ,
Elec'h n'oc'h eus qet a vili ;
Eur myster bras eo zo formet
Ha gant Doue e-unan grêt .

Neuze e scrisjont qen horrubl :
O sònjal e voa impossubl :
Qer buan ez int sortiet ,
Ar vreg a voe ganto croguet ,
Perclus demeus he izili ,
Hep gallout eu em remui .

Hemân zo miracl , christenien ,
Grêt dre ar vertuz eus ar Men !
Preserv eur buguel ouz pêvar serpent ,
Ha digaç deân ar parlant !

Christenien , en parres Scaer ,
A dostic memes d'ar Chapel ,

E voa bet eur buguel coeet
Ebars en eur punç doun meurbet
Er spaç a c'hoec'h heur dianget,
Ne vouiet qet pelec'h voa êt :
Pa yas e vam da denna dour ,
E cav er punç ar chrouadour.

Hac hi o commanç da grial ;
Ar buguel a respont ractal :
Tavit , va mamic , emeàn ,
Me ne meus droug ebet amàn.

Ar vam pa glêvas aneàn ,
A c'houlennas prest digantân :
Petra en deus da breservet ,
N'en dout en dour êt d'ar güelet ?

Ar Men oc'h eus bars em c'herc'hen
Laqet ebars eun tam lien ,
En dour betec ennàn hon êt ,
Hoguen davantach n'en dàn qet.

Ouspen , eus unan crog em dorn ,
Toullet e dreid hac e zaou zorn ,
Hac eun toll lanç didan e vron ,
Hac eur groas ebars en e zorn.

A zo amàn ouz va zicour ,
Hac én ne douch qet ouz an dour ;
Hoguen , va mam , ho suppliàn ,
Va zennit demeus ar punç-màn.

Neuze voe gouezet ar burzud ,
Ma teuas nombr bras a dud :
Tennet voe demeus ar punç-se
Yac'h ha dispos , ha leun bue ;
Var ar c'bayer ez ê merget ,
Gant unan ha trégont sinet.

En eur mission en Naonet,
Selaouit oll hac ententet,
Pa voa ar bêleg o sermon,
Ec'h êru curun dirêson.

Dre an nor dal ec'h antreas,
Eur maleur bras a c'hoarveas,
Rac pévar c'chant den a senplas,
Trizec a vougas var ar plaç.

Ar bêleg atao a brezegue,
Hac a voe distolet ivé
Eus ar gador emesq an dud,
Hac e voe terrubl ar burzud.

Ruillet en eil penn d'eguile
Gant ar gurun en ilis-se;
Pa ne alle dont d'e laza,
En tolas eur c'hart léo ountâ.

Hac én dont da gonsideri
Petra voa ouz er prezervi :
Ebars e c'hodel pa zellas,
Men Coadri ebars a gavas,
En d'oa e dad roet dezâ,
Bet en Coadri o pardona.

Eur vreg , hanvet Mari Mene,
En poan demeus a vugale,
Er spaç eus a bemp de poanniet,
Ha gant an oll abandonet,
A voe inspiret gant Doue
Evit qemeret ar Men-ze.

Pa guemeras Men Sant-Salver ,
Ha laret varnân pemp Pater ,
Daou vuguel e deveus ganet ,
Cazi hep santout poan ebet.

Selaouit c'hoas , me ho suppli ,
Eur miracl grêt gant Men Coadri ,
Ha dre c'hraç Jesus , hor Zalver ,
En enor deàn en douguer.

A Goncquerne eur merdeat ,
Var ar mîr bras , en eur gombat ,
Laqet an tân en e lestri ,
Ha coeet er mîr da veuzi .

Tri-uguent den a voa el lestr ,
Ebars ar mîr a veuzas prest ,
Nemet tri' all hac an den-mân ,
A voa Men Salver gantân

Rac-se var ar mîr a neuyas ,
Dre ar vertus eus ar Men-Groas ,
Ar re all crog ennâo o zri :
Pebes moyen d'o c'hundui !

En Conquerne pa éruas ,
An dud ountân a c'houennas :
Pelec'h e mân ho consortet
Zo ganêc'h ac'han partiet ?

Ebars er mîr voemp attaquet ,
Sivoas gant an nemiet :
Lazet ha beuzet ar re all ;
Ne chom nemedomp hor pêvar .

Penos eta oc'h eus-hu grêt ,
N'en d'oc'h na beuzet na lazet ?
C'houi a voa assambles gante :
Penos éruet qementse ?

Qent eguet ma vœn ambarqet ,
Em boa alies suppliet
Qemer a Goadri ar Men-Groas
Da vont ganén var ar mîr bras .

Nemet va goapaat ne rêt,
Doue en deus o funisset :
Me voa beuzet qercoulz hac y,
Ma n'em bije bet Men Coadri.

Ne zeus den sur en nep carter,
Mar dè certen christen fidel,
N'en deus gantân en peb amzer
Unan eus a vein Sant Salver,
Ar Men a Zant Salver zo mad
Demeus an droug a zaoulagad,
Ouz an derzien n'eus qet güell tra
Eguel eva dour divarnâ.

Ha neuze, d'ar graguez a ve
En poan da c'henel bugale,
Ouz an dour, an tân, curunou,
Prezervi ra nep en dougo,

Ouz ar chass anrajet mad è,
Ha da laqat d'ar vugale,
Evit miret ne vent scòet
Gant bar na drouc avi ebet.

Gant ar Pab Celestin digacet
D'an nep en dougo gant respet,
Daou-uguent vloas eus a bardon,
D'hor pec'hejou remission,
O tont da zerc'hel ar Men-ze
En o c'homppagninez, nôs-de.

Mes ret eo lavarat varnâ
Pemp PATER, pemp AVE MARIA,
Hep mancout güech da bep güener;
Ze zo eun dra zo necesser:
Da zevez ar Güener ar Groas
Zo enni ind anuljou bras.

Da Vouel ar Sacramant ar yaou,
Ez eus ar memes Pardoniu,
Evelse d'ar Güener ar Groas,
Pa deu tud dêi var o zreid noas.

Eno e cavo ar pec'her
Digant Jesus-Christ hon Zalver,

Eun arm hac a zo crén meurbet
D'hon dioual ouz an drouc-speret.

Christenien, vandro ar Chapel
E supposomp douar zantel;
Rac nemet en douar Menez Calver
Ne zeus mysteriou hon Zalver,
Evit a guement a ve formet
En douar gant Salver ar bed.

Mes pa na ellomp monet dy,
Deomp oll d'ar Chapel a Goadri,
Ni gavo ar memes mysteriou
Formet gant hor Zalver eno.

Ar groas memes ma zeo bet
Jesus d'ar maro bet laqet,
Neo qet, credit petra laràn,
Preciuissoc'h eguet houmàn.

Rac-se c'hoas deomp-ni christenien,
Hac hor c'hizmou-ni, pec'herien,
O deus bet formet ar groas-se
Da laqat d'ar maro Doue;
Hac én e-unan en deus grêt
Ar mysteriou-mâ beniguet.

Rac-se comprenit-la, pec'her,
Pe ar groas grêt gant hor Salver,
Pe an hini a reomp hon unan
A die beza ar preciussa.

Jardin eürus ha beniguet,
Gant goad Jesus-Christ arrouzet,
Conservit din-eur boqet ros
D'am leprissa er barados.

FIN.



Montroulez, Imprimeri LÉDAN.